

Clairon Republicain

26^{me} KANOUE 1909

kompozet war doktrin ar veleien

Tostaet daglevet ar ganouen
Kompozet war doktrin ar veleien
Pere lar raskan pask hag absolven
Ma ne roer ket d'e o goulen arc'hant.

Rasket hardi, aotrou person,
Rasket pask ha komunion
Pa omp en gras dirag Jesus,
Ho malloz n'eo ket danjerus.

Leret d'in pelec'h beleien
Ema fondamant ho lezen,
Rag zur n'eo ket en Aviel
Nag en komzo an ebestel.

C'houi peuz invariant an ifern
Evit leunia ho pod espern,
Hag invariant ar purgatoar
Da greski d'ar paour he c'hlac'har.

Lezen hoc'h iliz n'eo ket groel
Gant Jesus vel ma leveret,
Jesus a ro tout en gratis
Mes c'houi werz beteg an ofis.

C'houi, pa varyo ar pinvidik,
A gano dezhan manifik
Ar *requiem*, al *libera*,
Ia, pa ve arc'hant d'ho paea.

Mes pa ve maro eur paour kez,
Eur lonker dour ha patatez
C'houi lezo hema er glac'har
Da grial fors er purgatoar.

C'houi ra vel Judas beleien
Divezan euz an eskibien,
Judas treitour, vit kaout arc'hant
A werzas Jesus innosant.

Mes breman man ar vrud er vro
Ez eo Doue a gommando,
Renko an Eskop, ar veleien,
D'ho zro ober pinijen.

Breman d'ac'h me a laro.
Pegouls ma pardon kaer ar vro
Just deiz gouel an Asansion
Ma er chapel Barados ar pardon.

Mar pe c'hoant, evit dek gwennek,
Dre 'n hent houarn c'houi vo kaset
An deiz se d'ar Baradoz
A dont d'ar gaer ben ma vo noz.

Ma roet hoc'h arc'hant d'ar veleien
C'houi vo kaset d'ar min trousken,
Seiz mitleo en tu all d'ar Baradoz,
Eno renkfet chom deiz ha noz.

Birviken fin na ve d'am zon
O tispenn doktrin ar person,
Lennit hoc'h un' komzo Doue
Hag e wellfet ar wirione.

Gant aoun da facha ar person
E renkan achui ma zon,
Rag ar wirione a daol zur
A fach an holl dud diskulpur.

Ar c'hatolik Francais
Ganet a badeet en Breiz-Izel,
En hano an Tad, ar Mab ive,
Hag ar Speret Santel,
Amen.